

2

KANTIK NEVEZ

EN HENOR

DA ITRON VARIA AR SKLERDET

VAR DON : *Ni ho salud stereden vor.*

I

Itron Varia ar Sklerded,
Hor patronez, hor mam garet
Plijet geneoc'h euz bar an Ee
Rei sklerijen d'ho pugale.

DISKAN

*Ni ho salud Mari,
D'hoc'h hano meuleudi.*

II

A vihanik hon deuz deskest
Hoc'h henori hag ho karet,
Evidomp c'houi zo eur vam vad,
Varnomp e par ho taoulagad.

III

Bep bloaz pa zon kloc'h ho pardon,
Ni zant ar joa en hor c'halon,
Kement neuze a c'hell kerzel
Da bardona deu d'ho chapel.

IV

Guelet a rer tud a bep stad,
Tud kreiz ho brud, tud var an oad,
Darn deut a dost ha darn a bell
Da zaludi ho mam zantel.

V

Ama c'houi glev kement hini
A vir galon deu d'ho pedi,
Ama pep den gav ar gueled,
Gueled ar c'horfpe ar spered.

VI

Ar bed, siouaz ! ia falloc'h-fall,
En amzer-ma zo kalz tud dall,
Ken tenval eo ho taoulagad
Ma ne velont mui an hent mad.

VII

Sklerijennit an tad, ar vam,
Grit ma vevint ato divlam,
Ha ma zavint ho bugale,
Vel ho zud koz, hervez Doue.

VIII

Sklerijennit ar iaouankiz,
Grit ma karo hent an iliz,
Ma troio kein d'an ebatou
A goll kement a eneou.

IX

Sklerijennit ar vugale,
Grit ma heuillint lezen Doue,
Ha ma kavint ato skuer vad
A berz ho mam, a berz ho zad.

X

Sklerijennit ar servicher
Ma gompreno mad he zever,
Ha ma poanio, evel m'eo dlet,
Da labourat gant lealded.

XI

Sklerijennit ar re a zo
Karget ganeomp da ren hor bro,
Ra vo ato ho lezennou
Hervez Doue hag he viriou.

XII

Sklerijennit ar veleien
Digaset deomp vit hor c'helen,
Grit ma ielo nerz ho c'homzou
Beteg goeled ar c'halonou.

XIII

Sklerijennit hon Tad Santel,
Dez'han ato bezomp fidel ;
Ra vo moulet ha skrivet don
Hano ar Pab en hor c'halon.

XIV

Roit dez'ho oll, guerc'hez Kerrien,
Grasou a nerz, a sklerijen,
Hag en distro ni a gano
Meuleudi deoc'h ha d'hoc'h hano.

G. H.

EVIT AR « MAGNIFICAT »

Meulomp oll bepret
Intron Varia ar Sklerdet.



IMPRIMATUR :

Quimper, 25 Avril 1921.

P. MESSENGER, *vic. gén.*